

8N1-1-007

IMPRIMATUR :

Die 7 Septembris 1909.

Em. FLÉTER, *vic. gén.*




KANTIK ITRON VARIA AR SKLERDET

E KOMBRIT



Moullerez, 7, ru an Dudchentil, Kemper.





DISKAN :

*Intron Varia ar Sklerdet,
Klevit mouez ho pugale :
Hed hor buhez Mamm benniget
Hon diwallit noz ha de !*

2. Choazet a bep eternite
Da veza mamm da Jezuz
Roet oc'h da vamm deomp ive,
C'houi hon rento holl eürus !
3. Lec'hiou santel a zo merket
Da enori ar Werc'hez
Eno e skuilh warnomp bepred
Tenzoriou he madelez !
4. Chapel ar Sklerdet zo brudet
Dre ar burzudou dispar
A ra ar Werc'hez benniget
E-kenver an nep he c'har !

5. Evit dont betek ar Sklerdet
Pelerined gant gwir feiz
Da bedi hor Mamm benniget
A dreuz pevar c'horn Breiz !
6. A-hed an hentchou o gweler
Oc'h erruout a bell-bras
En eur bedi daoust d'o skuizder
Daoubleget war o fenn baz !
7. Darn a deu d'he zrugarekaat
Euz ar grasou o deus bet
Darn all, euz an droug daoulagad
A c'houlenñ beza pareet !
8. Evidomp-ni holl Bretoned
A lavar a vouez uhel
Kent evit mankout d'ho karet
Ni ve gwell ganeomp mervel !
9. Dirak hoc'h imach benniget
Er Sklerdet ni a bedo
Pa vimp tentet pe glac'haret
Gant fizians ni a gano :
10. D'an holl e Kombrit, Mamm Doue
O c'hoant hirio goulennet
Ma savetaimp hon ene
O kenderc'hel d'ho karet !